


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 20 - Eost 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Ar preder yezhel hag ar preder politikel	p. 225
"Prederiadennoù diwar-benn ar Yezhoù hag ar Brezhoneg" (arroud)	p. 230
An Emsav hag ar Vro (5) [EMVR-29 - 32]	p. 231
Lizheroù p. 231, Darvoudoù p. 234	
Notennoù armerzhel (17), ar riñverezh armerzhel II. An nevidoù	p. 240

AR PREDER YEZHHEL HAG AR PREDER POLITIKEL

E 1936 e tisplege Meven MORDIERN e vennoziou-diazez er Preder-iadennoù diwar-benn ar yezhoù hag ar brezhoneg. Kalz levezon o deus bet war an emsaverion ha gallout a reer anzav dichipot o deus talvezet ar mennadoù-se da brientiñ ar benveg yezhel evel m'en anavezomp bremañ. Koulskoude ne oa prederiet Meven MORDIERN nemet gant ar yezh, en diavaez eus pep politikerezh, en diavaez eus ar Stad ivez, sellet alies gantañ evel un dra didalvoud a-walc'h evit adsevel ar yezh. Diglok e oa eta ar mennoziou-se ha da heul eo chomet diglok preder meur a stourmer betek hiziv, ken e ve mat keñveriañ muioc'h mennadoù kevredigezhel an Emsav e 1968 gant soñjoù yezhel Meven MORDIERN e 1936.

Oc'h ober kement-se e roomp da Veven MORDIERN al lec'h reizh a zo dleet dezhañ en istor an Emsav (1), met ne zegemeromp ket anezhañ evel ur prederour gouest e vennoziou da hentañ an Emsav etrezek ar pal a zo adsavidigezh ar Stad Vrezhon da gentañ a-benn adsevel en diwezh ar bobl vrezhon a-bezh ha degas un dra bennak talvoudus d'an denelezh. Ne lavaromp ket kennebeut ez eo didalvoud plediñ gant ar yezh pe ar yezhoniezh, rak padout pe greskiñ a ra zoken ar preder yezhel bete vremañ, alies zoken war ziazezoù reish-oc'h eget e derou ar c'hantved. Komz eus preder yezhel pe bleidiñ gant ar yezh zo anzav ne glot ket ar yezh hon eus gant ezhommoù a-vremañ ar bobl vrezhon. Ha siwazh, gwir eo ne oa yezh dereat ebet abaoe ma oa bet pulluc'het ar c'hrennvrezhoneg e rannyezhoù niverus N'hon eus ket eta ur yezh da adsevel, met unan da grouiñ evit komz sklaer. Pechañs ne vo yezh ebet nemet krouet e ve ur gevredigezh nevez a vrezhonegerion, pezh a oar dija an dud yac'h a spered a stourm evit Breizh.

Met adkemeromp unan hag unan gerioù-stur Meven MORDIERN ha

klaskomp o lakaat da dalvezout war an dachenn gevredigezhel pe bolitikel, - pezh a vo gwelloc'h, - : unvaniñ, unyezhañ, gwellaat ha kreskiñ.

Prederiet e oa Meven MORDIERN gant unvanidigezh ar yezh. Dalc'h-mat e tistro war ar c'hraf-se : ar brezhoneg a rank bezañ ur yezh unvan evel an holl yezhoù meur a sevenadurezh. Diaes eo deomp hiziv kompren an treuzvarnioù a oa oc'h ober o reuz e Breizh d'ar mare ma klaske Frañsez VALLEE (2), Meven MORDIERN, Roparz HEMON (3) ha tud all c'hoazh krouiñ er vro-mañ ur yezh unvan e-keñver skrivadur, geriadur hag ereadurezh. Eneberion diboell zo bet, eneberion evezhiek ivez a stourme evit gwir a-enep da bep striv gouest war hir dermen da dennañ ar vro-mañ diouzh an dizurzh : ar re ziwezhañ a oa gallekaet a spered, forzh petra a lavarent a-hend-all. Hogen unvanet eo bet ar yezh, hag unvanet mat-kenan peogwir eo bet unvanet e sigur ur mennad politikel a oa d'ar mare kelennidigezh ar brezhoneg en holl skolioù a-benn adsevel ar spered broadel e-touez ar yaouankizoù : mat e ve d'ar re a c'harm gwech ha gwech all d'an unvaniezh gouzout n'eus tu ebet da ziazezañ un unvaniezh bennak etre tud na fell ket dezho d'an nebeutañ degemerout ar yezh unvan da ziazez d'o c'hendivizoù : penaos en em glevout pa ne gomzer ket an hevelep yezh ? Hag amañ e teu ar gudenn yezhoniel da vezañ politikel. Soñjal a ra deomp n'eo ket a-walc'h unvaniñ ar yezh, met ret ez eo c'hoazh unvaniñ ar Vrezhoned kenetrezo.

Da gentañ moarvat e c'haller soñjal el lennegezh vroadel savet en ugentvet kantved. Dre studiañ skridoù Roparz HEMON pe Jakez RIOU, a lavaro darn, e vo unvanet an dud e-keñver ar spered d'an nebeutañ. Met n'eo ket sur tamm ebet. Ar gounid a denner eus an darempredoù gant ar skrivagnerion-se zo en em voazañ da vat ouzh ur yezh unvan, hogen n'eo ket a-walc'h. Lakaet e vezer ivez da brederiañ, pezh a zo unan eus kefridioù ul lennegezh vroadel. Diorren ar mennozioù a vo graet eta, hogen da c'hortoz ez eus ivez e vo speredek ar studierion hag e vo neuze o mennozioù nevez diforc'h a-walc'h diouzh re o zadoù

speredel, hag an unvaniezh klasket a ziflipo ur wech ouzhpenn, war ul live uheloc'h emichañs, met a ziflipo evelkent e skolioù lennegel pe veizel disheñvel ma n'eo ket enebet.

Ouzhpenn, klask unvaniñ an dudazo a-du gant pal hollek an Emsav zo mat, met n'eo ket a-walc'h, ret eo unvaniñ pe frammañ ivez zoken ar re n'emaint ket a-du, e doare pe zoare, peogwir ez embannomp ne c'hell den renaviañ e vro, e Istor pe e sevenadur, dalc'het ma'z eo pep hini gant ar gefridi en deus e-keñver e vro hag an dlead da skoazellañ adsavidigezh e genvroiz.

Tud 'zo da skouer a gred o deus ar gwir da ebatal e-pad miz-vezhioù an hañv war aodoù an Atlantel hag a-hed ar goañv war ziribinoù an Alpoù hep en em drechaliñ gant reuzeudigezh ar beorion a zo e mereurioù pe e greantioù Breizh o pourchas arc'hant dezho. Ne c'haller ket asantiñ e vefe disrannet ar Vrezhoned e seurt doare direizh a-grenn, met unvanet-strizh e tleont bezañ kenetrezo kentoc'h dre o strivoù kenkoulz ha dre zaspazhidigezh ar c'horvoderioù.

N'eo ket dre al lennegezh hepken e vo unvanet an dud neuze. Ret eo dibab a-benn ar fin ur pal politikel, ur pal a c'hallo dedenn an dud hag o lakaat d'en em glevout en ur stourm youlek. Anat eo ne c'hell ar pal politikel bezañ nemet ar Stad Vrezhon evit ar mare. O tegemerout e rank an Emsav disoc'hañ un deiz ^{war} d'ar Stad Vrezhon hag en em brientiñ adal bremañ d'al labour stadel e vo tu da veizañ reishoc'h an diskoulmoù a zo da reiñ d'an diaesterioù a sav bemdez etre an dud. Dont a ray da vezañ anat n'eo ket stummet a-walc'h an emsaverion a-benn levian ur Stad a vez renet evelkent gant doareoù-labourat disheñvel diouzh re ar festoù-noz pe ar gouelioù folkorel.

Meizet e vo raktal ivez n'hon eus ket prientet c'hoazh kalz eus an ensavadurioù stadel na c'hell ket ur vroad dioueriñ en amzer a-vremañ. Kemeromp skouer an Deskadurezh Vroadel : a-boan m'eo kroget un toulladig tud da bleidiñ gant ar gudenn ha da frammañ ar gwazadurioù reañ. Koulskoude eo unvanet start dija kenetrezo an emsaver-

ion a bled gant Skourr an Deskadurezh Vroadel, ha se peogwir ez int frammet strizh e sell d'ur pal politikel rik a zo lodennañ un deskadurezh nevez da holl rummadoù ar gevredigezh vrezhon. Talañ a reont aze ouzh ul labour diaes o laka da brederiañ kalz hag o redi da ziorren a zeiz da zeiz an holl wikefreoù o deus ezhomm evit seveniñ o uhelvennad politikel.

Preder Meven MORDIERN a oa unvaniñ ar yezh, pezh a zo dic'hallus a-grenn a-ziavaez d'ur mennad politikel resis, anzavet pe get. Preder an Emsav hiziv zo unvaniñ ar Vrezhoned, pezh a zo ken dic'hallus-all ma ne zibaber ket adal an derou ar Stad Vrezhon da bal. Kement tra a gil dirak ar framm stadel a deuz tamm-ha-tamm en ur goumoulenn a faltazi. N'eus hiziv eta unvaniezh ebet e-touez ar Vrezhoned nemet etre ar re a brient adal bremañ ar Stad Vrezhon. Pep unvaniezh all a ya gant an avel evel an delioù disec'het, evel ma'z echu e poubellennoù al ledemsavioù ar pennadoù amlennegel a glask boueta daoust dezhi ur boblañs dibolitikaet.

Ar mennad meur evit Meven MORDIERN n'eo ket hepken unvaniñ ar yezh, met dreist-holl unyezhañ ar vro. Lavaret eo kement-se hep diskouez un hent resis o kas eus digenvezded ar yezh a-boan unvanet da advrezhonekadur Breizh. Krediñ a ra start Meven MORDIERN ec'h en em led o ar yezh anezhi hec'h-unan, pe d'an nebeutañ e vo tu d'he ledañ dre sevel bodadoù "imbourc'herion nepkredenn, pe da vihanañ, gant imbours'herion a zo enno lealded hag emvestroniezh a-walc'h evit lezel o c'hredennoù relijiel, politikel ha kevredadel er-maez bewech m'emaint o klask ar wirionez". Met peseurt gwirionez a vije tu da dizhout en diavaez da nep speredelezh ha hep ur gelennadurezh politikel ha kevredadel ? Peseurt kevredigezh a c'halljed frammañ ? Hini ebet evit gwir, ha mat eo kounaat e nac'h atav ar Stadoù impalaerel ar gwir ouzh an danvez sklaved da ober dave d'ur gelennadurezh politikel a rofe dezho ar binvioù ret evit talañ ouzh an enkadenn bolitikel m'emaint. Tud kraouiet en o abafded veizel ha bac'het en o

enkadennoù armerzhel, setu petra e teufe hor brezhonegerion da vezañ : sklaved a'n em frealzfe o hunvreal e vefent o skarzhañ ar galleg eus ar vro kent bezañ dipitet o welout ne sevenont netra. Rak penaos skarzhañ ar galleg hep skarzhañ ar c'hallegerion ? Meven MORDIERN ne lavar netra war ar c'hraf-mañ. Emichañs ez erbedfe adarre doareoù ar vrezelourion ragistorel a ziskoulme ar c'hudennoù dre zistrujañ an dud. Ha dres, da seurt emzalc'h e vezer kaset war-eeun gant an treuzvarnioù a ra eus enkadennoù Breizh pe ar brezhoneg ur gudenn yezhoniell. O nac'h ez eo diaesterioù Breizh hag holl drubuilhoù an Emsav kudennoù politikel da gentañ holl e nac'her ivez diazezañ ur preder politikel reizh ha diorren ur genurzh efedus evit aozadurioù an Emsav bremañ ha diwezhatoc'h evit ar gevredigezh pe ar Stad Vrezhon. Ha petra e teuy da vezañ gwirioù an den ha rezid ar vroad hep ur genurzh kedvuhezal awenet gant ur gelennadurezh politikel ha kevredadel resis ? Den ne oar, met anat eo e kouezhfe buan ar Vrezhoned en ur stuzegezh tud ouez mar asantfent ren o stourm hervez tezennoù ur "sevenadur dibolitikel".

Ne c'hallio biken ur brezhoneg dibolitikel en em ledañ war Vreizh a-bezh, ha n'hon eus ket muioc'h da unyezhañ ar vro evit ober plijadur d'un nebeut yezhkadourion ginus n'o deus netra da zegas. Ar pezh a zo da ober eo sammañ reuzeudigezh ar geizh e-keñver spered, meiz ha madoù, hag e-touez ar geizh emañ da lakaat da gentañ an holl Vrezhoned diwriziennet a nac'h o dleadoù e-keñver o bro, forzh pegement a vadoù danvezel a berc'hennont a-hend-all. Kement-se n'eo ket ken ledañ ar brezhoneg evitañ e-unan, met frammañ ur geoded nevez a zo ar brezhoneg unan eus hec'h elfennoù, he benveg yezhel ha netra ouzhpenn.

Pegañ skritelloù brezhonek, livañ mogerioù pe hentoù, hepken evit lakaat brezhoneg dirak daoulagad an dud ne c'hell ket neuze bezañ ouzhpenn un embregadenn a vruderezh. N'emañ ket aze al labour pennañ. Ar re a c'hoanta mirout pinvidigezhioù yezh ar bobl a rank kompren ne vo trec'h ebet nemet dre astenn d'ar vro a-bezh an Emsav

hag e holl aozadurioù frammet. E kerz aozadurioù an Emsav emañ hiziv tonkadur hor pobl, hor yezh hag hor sevenadur. Setu perak eo ken pouezus ar pezh a c'hoarvez en Emsav daoust d'an nebeut a dud a zo ennañ evit ar mare. Ret eo damantiñ da vuhez an Emsav rak n'eus nemet drezañ e c'hell ar bobl vrezhon en em anaout ha digraouiañ. Mar bez graet fazioù pe hentet fall an Emsav e vo marteze goueledet da vat galv ar vro-mañ d'ar rezid.

Met an Emsav e-unan ne c'hall ket astenn da vat rouedad e aozadurioù kevreet war ar vro keit ha ma ray diouer dezhañ darn eus ar skourroù na c'hell kevredigezh ebet padout hepto er bed a-vremañ. An Emsav eta, daoust ma sell gant daoulagad dibikouz ouzh al labour ramzel a zo da gas da benn n'eo ket klok evit ar mare. Dre ma'z eus tud a bep ampartiz o tont d'an emskiant vroadel ez eo ret reiñ tu dezho da unvaniñ o barregezhioù en ur zigeriñ skourroù brezhonek evit pep embregerezh a gas davit adsavidigezh ar vro hag ar Stad Vrezhon.

-
- (1) Sl.: Meven Mordiern, Emsav 2/7. Oberenn Meven MORDIERN :
Frederiadennoù diwar-benn ar Yezhoù hag ar Brezhoneg a voe
embannet gant Gwalarn e stumm c'hwec'h levrenn e 1935-36.
- (2) Sl.: Frañsez Vallee, Emsav 3/58.
- (3) Sl.: Lec'h Gwalarn en Emsav, Emsav 6/137.

"Unvaniñ. Unyezhañ. Gwellaat. Kreskiñ. Truezomp d'an dud digalon ha dinerzh n'int ket evit tañva hoalusted al labourioù en em gav berrzastumet er pevar ger-se. Ken dedennus ez int e gwirionez ha m'emañ bet, evit ar veajourion hag an drevadennourion eus Europa e-pad ar pevar c'hantved diwezhañ, digeriñ d'ar sevenadurezh nevezvedoù tramor, hag, evit ar ouizieion kempred dezho, sevel, diwar anaoudegezhioù nevez, skiantoù nevez. Amañ ivez emañ pep tra da grouiñ hag ur bed nevez-flamm da sevel en ur yezh manet gwerc'h betek-henn diouzh pep implij skiantek, ha hi donezonetoc'h koulskoude eget ar galleg war gement a sell an emastenn eus an deskadurezh hag eus ar sevenadurezh."

Meven MORDIERN, Frederiadennoù..., Levrenn V
Gwalarn 86/36-7 1936

A N E M S A V H A G A R V R O (5)

LIZHEROU

"Da'meno, mont evel ma rit eus keal ar stuzegezh da geal ar speredegezh a rank tremen dre geal ar patromoù stuzegezhel evel ma'z int bet termenet gant ar stuzegourion amerikan.

"Danvez krai ar gevredadoniezh eo ar stuzegezh : dindan he skritell e stalier kement devoud a c'haller deskrivañ e buhez ur stroll kevredigezhel. Ar patromoù stuzegezhel zo dres ar furmoù stabil a c'haller digejañ eus an danvez krai-se : framm ar gerentiezh, aoz ar glad, neuz ar meuriad, ar barrez pe ar gumun, reizhiadoù ar c'henderc'hañ, h.a.. Ar speredegezh zo meizadur ar vuhez hag ar bed evel m'emañ emleget gant patromoù stuzegezhel ur gevredigezh fetis. Daou argerzh zo enta, daou gammed eus ar spered, evit tremen eus par ar stuzegezh da bar ar speredegezh. Da gentañ, un argerzh dezrannañ : eus reustl ar stuzegezh evel m'he c'haver war an dachenn e tigenvezer furmoù fraezh, met darnel : ar patromoù stuzegezhel. D'an eil, un argerzh kevanañ : adstrollañ a reer ar patromoù stuzegezhel diwar-bouez ur ster boutin a gaver dezho, a-benn savelañ un unvez kempoell, fraezh ha hollel a zo ar speredegezh. An argerzh kentañ ne c'houlenn digant an imbourc'her nemet ar stummadur gouiziel boas, un arbennigadur war ar gevredadouriezh. An eil argerzh ne c'hell bezañ kaset da benn nemet dre hir breder, gant tud o verañ ar meizadoù diwar-bouez o buhez ha n'eo ket hepken evel binvioù diavaez na engouestlont ket o zonkadur. Maodez GLANNDOUR e-unan a verke pegen diaes, hag arvarus, ez eo termenañ speredegezh ur bobl.

"Diaes pe get, hent an Emsav eo gounit anaoudegezh eus speredegezh Vreizh. Meur a wech, en niverennoù tremenet, hoc'h eus pleustret war gudennoù ar stuzegezh, - en un doare nac'hel a-walc'h, ret eo henn anzav. En em dreiñ a rit bremañ war-du ar speredegezh. Ha mat e rit. Ne gredan ket pellaat diouzh ho mennad mar pouezan war ar spletoù a zo da dennañ eus arver keal ar patromoù stuzegezhel. Amañ dindan e kavit un dornadig notennoù am eus taolet war ar paper nevez 'zo en ur lenn Emsav.

"Gant diazezidigezh ar Stad C'hall e Breizh eo bet tonket buhez pobl Vreizh da ~~vazañ~~ mouget war bep tachenn, ken e-keñver kevredigezh, armerzh pe bolitikerezh pleustrek. Unan eus ar c'hudennoù a zo dirazomp eo gouzout petra a zegas ur Stad d'ur vroad hag, ent-fetis, petra he deus degaset ar Stad C'hall da Vreizh, petra a zegaso ar Stad Vrezhon da Vreizh.

"Pa lavaromp : distrujet eo bet ar vuhez vrezhon gant ar Stad C'hall, pe : roll ar Stad Vrezhon a vo reiñ an tu da vuhez ar vro

da vleuniañ en-dro, petra a fell deomp menegiñ dre "ar vuhez vrezhon", "buhez ar vro" ? Un dra bennak, a dra sur, en deus da welout a-dost gant ar patromoù stuzegezhel. Warno e kemer harp tud ar vroad da veizañ ha da enkorfañ o sevenadur, ha dreist-holl ez int an aveadur ret da genderc'hel gant ar seveniñ. Kemeromp da skouer framm kevredadel ar barrez e Breizh; dre ar framm-se e c'halle hon tadoù embreger ur spered a gumuniezh a santomp c'hoazh bezant en hon touez daoust ma'z eo aet da get ar framm a roe tu d'e embreger ent-fetis. Anat eo ez aio da get ar spered-se a gumuniezh ma ne vez ket krouet frammoù kevredadel nevez o klotañ outañ hag o reiñ dezhañ an tu d'en em ziorren en-dro. Marv e vo ar stuzegezh henvoazel, hag ur stuzegezh arnevez he devo kemeret he lec'h, met advevañ a raio ar patrom stuzegezhel kozh er frammoù nevez, ha bennozh dezhañ ne vo troc'h ebet, lakaet e vo kevala ar speredegezh vrezhon e kerz ar remziadoù nevez.

"Lavaret ez eus bet ne c'hell ket ur bobl diorren he sevenadur hep Stad. Ken gwir all eo lavarout ne c'hell ket ur Stad bezañ savet hep derc'hel kont eus ar patromoù stuzegezhel broadel, da lavarout eo eus ar pezh a zo stabil, kendalc'hel hag emouiziek e froud stuzegezhioù ur bobl. Mar'd eus ur pont da gavout, ken e-keñver meiz ken e-keñver ober, etre studegezh ha stuzegezh, e tremen ar pont-se dre ar patromoù stuzegezhel.

"Un nebeut evezhiadennoù a fell din ober, o tennañ d'an tach-
ennoù ma labour an Emsav.

"Arouezius eo roll ar yezh er vroad hag er Stad. Ouzhpenn bezañ ar benvegadur boutin d'an holl batromoù, ez eo ar yezh ur patrom stuzegezhel drezi hec'h-unan ha, muioc'h c'hoazh, ur moull a batromoù stuzegezhel. Ul lec'h unel ha diziouerus zo enta d'ar yezh e buhez pep broad. N'eo ket un dra nevez ha meizet eo bet kement-se abaoe an amzerioù koshañ. K'ong-zi (Konfusius) a lavare : "Ma ne vez ket azas an anvidigezhioù, ne c'hell ket bezañ reizh furm ar c'homzoù; ma ne vez ket reizh furm ar c'homzoù, ne ra ket berzh labour ar Stad; ma ne ra ket berzh labour ar Stad, nag al lidoù, nag ar sonerezh ne vleuniont (); nag ar barnadennoù nag ar c'hastizoù n'int evit tizhout o fal, ar bobl ne oar ket penaos ober. E-se, ar Fur, pa grou anvioù, a ra e doare ma vo reizh outo furm ar c'homzoù ha, p'o arver, a ra ivez e doare ma teuint da wir ober".

"En un doare anat e weler pegen drastus eo bet evit Breizhiz degemerout ar galleg en o c'hedvuhez. Daoust ma ne oa ket prederiet nemeur gant muzuliañ al labour drastus-se, e verk ar c'hevredadour gall E.MORIN en e levr : La métamorphose de Plodemet, kement-mañ : "Skolek e chom galleg tud Plozeved". Desket o deus ur yezh estren, deskoniet int bet war batromoù stuzegezhel estren, ha n'o deus ket o enkorfet. Goap a reer eus bourc'hizion kêrioù Breizh pa bledont aketus, evel bourc'hizelezh ar broioù isdiorreet, da varmouzañ doareoù-bevañ ha -komz bourc'hizion ar vro vestronier. Ken faos ha torkulet eo galleg ar gouerion hag ar werin dre vras. Ar yezh-se n'eo ket dezho. Ne berc'hennont ket o bed drezi,

ha seul vuioc'h a se, ne grouont netra ganti. Marmouzañ a reont muioc'h eget na vevont. Kriz eo se.

"Studiet eo bet c'hoazh gant Emsav kudenn isdiorreadur Breizh. E kempouez edo framm armerzh ar vro, - ma n'eo ket ar sujidigezh he deus torret ar c'hempouez-se, ar sujidigezh eo he deus miret a adkavout ur c'hempouez nevez. E-se, kempouez un armerzh ned eo ket ur c'hempouez etre nerzhoù armerzhel hepken, met etre an nerzhoù buhezel ha kedvuhezel, kevredadel ha politikel a c'hoari ennañ; ken ez eur aotreet da veizañ frammoù armerzh ur vro evel patromoù stuzegezhel. Ha seul greñvoc'h e tleomp pouezañ aze ma sellomp an armerzh evel un tu eus ar seveniñ : amkan nesañ ha ret ar c'henderc'hañ zo moarvat pourchas madoù-beveziñ diziouerus d'ar beved, met ar pal zo sevenidigezh mab-den evel buhez ha kedvuhez. Talvoudoù speredel zo enta enkorfet e reizhiad armerzhel pep bro, un enkadenn speredel eo pep enkadenn armerzhel, ha distrujañ reizhiad armerzhel ur vro zo skeiñ ganti ur gloazadur a c'hell bezañ marvus dezhi dre dizhout he spered muioc'h c'hoazh eget he c'horf.

"Diskoulmoù eus da enkadenn armerzhel Breizh, hogen diskoulmoù brezhon, e-ser un emroadur renet gant Breizhiz emouiziek ouzh speredegezh ar vro hag ar patromoù ma voe enkorfet. Arabat gortoz eus ar Stad C'hall estreget ur freuz brasoc'h c'hoazh. Ret eo lavarout ivez e ve ken freuzus all ur Stad Vrezhon a glaskfe an diskoulm hep derc'hel kont eus an tresoù don garanet e buhez ar vro-mañ, ar pezh a anvomp en ul lavar resisoc'h : ar patromoù stuzegezhel brezhon.

"Arabat intent e vennan amañ un distro pleustrel d'an tremened. Ne gilant ket rak ur gounezerezh brezhon diouzh an aoz kengladel, gant kendrevioù ha kevelourioù a ve da geñveriañ ouzh ar c'h-kibboutzim pe ar c'hkolc'hozioù, met da geñveriañ hepken, rak, krouet hervez ar patromoù brezhon, e klotfent ouzh spered tud ar vro-mañ.

"Evit ar mare ne weler ket kalz ur preder a seurt-se o ren e-touez kouerion hag armerzhourion Vreizh. Emaint o tizoleiñ spletoù ar sokialouriezh hag an armerzhioù steuñvet p'emañ armerzh Frañs dindan steuñvoù abaoe ugent vloaz endeo. Dre Frañs ha gant dale e tizolo Breizhiz ar bed ha, dre ret, ur skeudenn diazas eus ar bed eo a zeu dezho. Ar gouerion vreizhat a bren un traktour evit un atant a 6 hektar, a samm dleoù evit prenañ muioc'h a gevala eget na c'hallint ardalañ, ne verzont ket emaint o trevezañ, int en ur vro isdiorreet, ar stuzegezh o ren er vro diorreet amezek, ha dre-se o treiñ kein ouzh hent an diorreadur. Mar'd eo tamalladus ar stuzegezh-veveziñ er broioù greantel, petra lavarout eus ur vro isdiorreet a glask sankañ er stuzegezh-se pa gemenn groñs dezhi an enkadenn m'emañ ur politikerezh-postañ hag ur stuzegezh-dioueriñ.

"Ur skouer all eus arallekadur pobl Vreizh eo an arver a ra eus ar patromoù stuzegezhel gall er vuhez politikel foran. Menegiñ a fell din ar patromoù gall a "du-kleiz" hag a "du-dehou". N'eo

ket e tinac'han talvoudegezh ar patromoù-se el lec'h end-eeun ma 'z int bet furmet. Moarvat e klot an tuioù kleiz ha dehou gall gant Istor Frañs hag ezhommoù ar C'hallaoued; ne glotont avat na gant Istor Breizh na gant ezhommoù ar Vrezhoned. Studiit kevredadouriezh ar bobl vrezhon abaoe dibenn an 18^t kantved : ne c'hellit kompren ar vuhez politikel er vro-mañ ma ne sellit ket outi evel un heklev eus ar pezh a dremen e Paris. N'eus ket splannoc'h azon a arallekadur. Ar pezh a zo, pe a c'hell bezañ, daelerezh frouezhus e Paris a zeu da vezañ, ur wech plaket war Vreizh, eneberezh diziskoulm etre Breizhiz hag elfenn a zizunvaniezh. Ar patromoù stuzegezhel gall a ra keodedourion eus ar C'hallaoued, met ne reont nemet arallekaat ar Vrezhoned. Ar gudenn avat n'emañ ket etre degemerout ha nac'h degemerout ar patromoù gall, met e diorren ar patromoù brezhon." (21 07 68) EMVR-29

DARVOUDOÙ

Strakadennoù e bro an Aerouant Ruz

Komzet e vez kalz e Breizh abaoe daou vloaz eus un aozadur kuzh oc'h ober gant ar sponterezh : ar gourdrizouù, an tangwalloù, ar bombez. Dudius eo keñveriañ an darvoudoù a c'hoarvez en hor bro gant ar pezh a dremen er broioù keltiek all. Emañ an traoù war sioulaat en Iwerzhon abaoe 1961, - an taol nemetañ o vezañ bet distruj ar golonenn Nelson e Dulenn e meurzh 1966 gant an Irish Republikan Army. En Alba n'eus tra, koulz lavaret. E Kembre avat e strak bombez abaoe un nebeut bloavezhioù, evel e Breizh. Daoust d'an diforc'hioù bras a chom etre hon div vro, ned eo ket didalvoud keñveriañ labour ar sponterion en daou du da Vor Breizh.

Ret eo lavarout kement-mañ da gentañ : nag e Kembre nag e Breizh n'eus e gwirionez un hengoun eus ar sponterezh evel en Iwerzhon (Fenians a-hed an 19^t kantved, Clan-na-Gael, I.R.A., I.R.B. e derou ar c'hantved-mañ). E Kembre evel e Breizh ne venn an aozadurioù kuzh, betek-henn da nebeutañ, nemet brudañ ar mennoz broadel ha rediañ an enebour da selaou goulennoù ar vroadelourion gerreizh. Diskaret e voe delwenneg Roazhon e 1932 gant Gwenn ha Du, rak ne chome mui nemet an hent-se d'en em zizober diouti : holl glemmoù ar vrogarourion n'o doa talvezet da netra. Nebeut goude, e 1936, ez eas broadelourion gembreat da dangwallañ savadurioù aerborzh ur skol-vombezañ nevez savet e Kembre daoust da eneberezh poblañs ar gontelezh hag ar vro a-bezh.

E-tro ar bloavezhioù 1960 e tiwanas adarre ar sponterezh e Kembre. En hevelep mare e c'hoarveze un dihun eus an emskiant vroadel e-touez ar re yaouank dreist-holl. Ur strollad broadel a oa : Plaid Cymru, diazezet e 1924, hag e rae berzh mui-ouzh-mui er boblañs. Hogen kempennelour e oa ha kavout a reas d'ar vroadelourion yaouank e oa ret ober an dispac'h hag arverañ ar feulster.

An dro evit ar vroadelourion yaouank da ziskouez o emzalc'h a voe roet dezho gant afer ar stankelloù. Evit pourchas dour d'o

greantioù e tivizas ar Saozon sevel stankelloù e menezioù Kembre. Beuzet e voe traoniennoù hag argaset ar gouerion gembreat a anneze enno. Plaid Cymru a savas a-enep d'an embregadurioù-se : hervezi ez eo an dour pinvidigezh ar vro hag e tle da gentañ pourchas da ezhommoù ar vro. A-du-rall, mar divizer e ezporzhiañ, e tleer sellout outañ evel ouzh forzh petore barregezh natur all ha lak-saat ar Soazon da baeañ evit e gaout. Evit ar Saozon avat ne c'hell ket an dour bezañ sellet evel ezporzhiet peogwir n'eus ket a harzoù etre Kembre ha Saoz, breizhveuriat eo ha netra ken. Klemm a reas Kembreiz ez eo korvoet o bro evel un drevadenn. Aozet e voe dibunadegoù gant Plaid Cymru hep an disterañ gwered war raktresoù ar Saozon. Anat e voe neuze d'ar vroadelourion e oa dav kavout araezioù efedusoc'h evit difenn douar Kembre.

E 1962 edo ar Saozon oc'h adailadiñ ur stankell e Tryweryn a-benn pourchas dour da Liverpool pa voe tarvet ar chanter. Daou vroadelour a voe harzet ha barnet da vizvezhioù toull-bac'h. E 1963 e voe tapet daou zinamiter yaouank all goude m'o doe distrujet ur c'hanerez tredan hag ur peul o tougen ul linenn varr-uhel. Kondaonet e voent ivez d'an toull-bac'h.

Ne oa nemet an derou. Anv a voe diwar 1964 eus un aozadur nevez, ar Free Wales Army, savet war skouer an I.R.A., dezhañ da bal ar Republik Kembre, - mat eo gouzout ne c'houlenn ar bPlaid nemet un dezvad a riez ezel eus ar c'hCommonwealth evel Kanada pe Zeland-Nevez. Brudet e voe ur gounideg tregont vloaz, Julian Cayo EVANS, evel unan eus renerion ar F.W.A.; embannet e voe e luc'hskeudenn gant meur a gazetenn : e welout a reer oc'h ober embregerezh-brezel gant broadelourion all. Diaes eo gouzout petra eo ar F.W.A. e gwirionez, hogen un dra zo sur : n'eus bet mui tapet den abaoe ma'z eo bet krouet ha kreskiñ a ra niver ar gwalldaolioù.

D'an 20 meurzh 1965 e tibunas 60 den yaouank e Clywedog war chanter ur stankell raktreset da zaspugn dour evit Birmingham hag a zlee beuziñ seitek atant. Devañ a rejont banniel Breizh-Veur ha diskleriañ : "Un taol-brezel eo a-berzh ar gouarnamant, dezhañ e respontimp gant estreget komzoù". D'an 25 here e voe peurechu stankell dTryweryn. Ne oa eno den eus an tiegezh roueel, met maer Liverpool a oa deuet : skoet e voe ur maen gantañ, harzet e voe an ambrougadeg kefridiel gant ur bagad a 600 broadelour skritelloù ha bannieloù kembreat en o daouarn, diframmet e voe an Union Jack. Ne emellas ket ar boliserion, daoust ma oant deuet niverus en deiz-se.

D'ar 6 meurzh 1966 e voe gwastet chanter Clywedog gant ur vombezenn grefiv. Evel en troioù all, e voe lakaet an tamall war F.W.A. gant ar bPlaid. Koulskoude, ar c'hadoriad, Gwynfor EVANS, a zisklerias : "N'on ket souezhet (). Mar gra an dud gant ar feulster, n'eo ket warnomp emañ ar bec'h da deurel, met war ar gouarnamant. Ne gemer tra a-zevri keit ha ma ne lakaer ket traoù

da darzhañ ha ma ne denner ket taolioù fuzuilh". E gwengolo 1966 e voe gouestlet un abadenn skinwel da vrogarourion Gembre ha pedet a-gevret Gwynfor EVANS en anv Plaid Cymru ha Julian Cayo EVANS evit Free Wales Army, - a-ratozh o doa graet tud ar skinwel da liammañ an daou aozadur. Rust en em ziskouezas kadoriad ar bPlaid evit ar sponterion : gousturiet e oant gant London, hervezañ, a-benn diaesaat an darempredoù etre ar bobl gembreat hag ar vroad-elourion, ha mirout ouzh an dud a emezelañ en emsav broadel a zo koulskoude demokratek-rik. Test e oa an diskleriadenn-se eus an eneberezh atav brasoc'h etre ar bPlaid hag ar F.W.A.. Ret eo lavarout edo Gwynfor EVANS o paouez bezañ dilennet, d'ar 14 gouere 1966, da gannad evit Caerfyrddin hag en doa asantet mont da sezañ da Westminster. Adalek an dibab-se e voe stanket an hent da bep emglev, daoust m'en doa ar F.W.A. embannet un arsav da aesaat e stourmadenn dilennel da Wynfor EVANS.

E derou 1967 e roas Cledwyn HUGHES, sekretour-Stad evit Kembre, da c'houzout e oa ur c'hengor arbennigourion o klask lec'hioù da stankelloù nevez a-benn bastañ da ezhommoù dour da zont kêr Liverpool. Diouzhtu e tisklerias Plaid Cymru he youl da aozañ goulennadegoù ha dibunadegoù a-enep da vekaerezh glenn Kembre, ha da skraperezh dour Kembre gant ar c'hêrioù saoz. Diouzh o zu ez embanne paotred ar F.W.A.: "Ober a raimp pep tra evit herzel ouzh ar gwalldaol-se. Betek-henn n'hon eus graet nemet gouzaviñ, diwar vremañ ez oberiimp a-zevri". E miz meurzh e voe dizoloet gant ar bolis ur bec'hiad gelinit ouzh ar sanioù o tegas an dour kembreat da Liverpool, ha distignet e voe e koulz an daranell-auriañ. E miz here e strakas ur vombezenn vihan ouzh stankell Vyrnwy. En hevelep miz e voe peurechu stankell Clywedog a lakae dindan dour-beuz 10 km eus an draonienn ha 5 atant. C'hwec'h miz dale a oa bet gant al labour en arbenn eus ar gwalldaolioù, ha meur a vil lur saoz a freuz. Tamm-ha-tamm e tevad da sellout ouzh ar F.W.A. a-zevri. Pa voe digoret ar pont bras war ar Severn a zle dougen ar gourhent London-Caerdydd, e toujas ar Saozon ur gwalldaol nevez. E-pad sizhunvezhioù e voe lakaet archerion da eveshaat deiz ha noz pileroù ar pont ha da zeiz an digoridigezh gant ar rouanez Elisabeth e oa polised an hanter eus an arvest-erion.

Ur bloavezh mat evit Plaid Cymru e voe 1967. A drugarez da labour Gwynfor EVANS ha d'ar brud gounezet gant ar mennoz broadel goude e zilennadure kreskas a-dizh niver an izili, - 25 000 e oa anezho e dibenn 1967. War un dro ivez e kreskas feiz an emsaverion en un diskoulm dezvel-breizhveuriat eus ar gudenn vroadel. Anv e veze graet er c'helaouennoù eus "increasing responsibility". Argaset e voe an oristaled ha klasket arbennigourion war dachennoù an armerzh, ar politikerezh, an deskadurezh, h.a.. Ar strollad broadel en em ziskouezas mui-ouzh-mui evel ur strollad ken diazezet hag ar strolladoù klasel saoz, gouest da gemer ar galloud e Kembre. Da geñver Kendalc'h Bloaz ar bPlaid, dalc'het e gwengolo

1967 gant 800 dileuriad, e voe tamallet gant an holl doareoù ar F.W.A.. Difennet-groñs e voe adalek an deiz-se bezañ war un dro ezel eus Plaid Cymru hag ezel eus Free Welsh Army, ha roet e voe urzh zoken da holl skourroù ar strollad da lakaat er-maez kement ezel en defe darempredoù gant an aozadur all.

N'o deus ket paouezet ar gwalldaolioù evit kelo, pell diouzh eno : n'eo ket stankelloù hepken a vez argadet met ivez savadurioù amaezhel saoz. An taol bravañ a voe hini ar 17 du 1967.

Ur c'heloù a lakaas droug er vroadelourion eo hini al lidoù bras a vo aozet d'ar 1^{añ} gouere 1969 evit kadoridigezh ar priñs Charles evel Priñs Kembre e kastell Caernarfon. Hemañ a yelo da dremen daou viz e Skol-veur Aberystwyth a-benn tapout un tamm deskadurezh war yezh hag istor Kembre. Redek a ra ar brud e rafe zoken ur brezegenn e kembraeg da zeiz e gadoridigezh, - fromet e ve holl Gembreiz a-se ha laouen-holl ar rannvroelourion o welout penaos e ra ar priñs ouzh e sujidi vat. Al luadenn-se a zisplij da emsaverion Plaid Cymru ha muioc'h c'hoazh da republikaned ar F.W.A.. D'ar 17 du 1967 e tlee Lord SNOWDON, Sir Cledwyn HUGHES hag uhelidi all en em gavout e Templ ar Peoc'h e Caerdydd evit prientiñ lidoù ar gadoridigezh; hogen da beder eur diouzh ar beure e tarzhas ur vombezenn greñv-tre e trepas an Templ oc'h ober ur freuz bras. Kentañ gwech e oa da sponterion ar F.W.A. lakaat ur vombezenn en ur gêr vras, - ouzhpenn-se, 150 m diouzh ti-kreiz polis Caerdydd ! Goulennataet e voe J.C.EVANS : nac'h a reas bezañ kemeret perzh en taol ha diskleriañ avat e c'halle pep Kembread bezañ lorc'h ennañ gant seurt oberenn a vrogarouriezh. Keuz en doa koulskoude d'un dra : na ve ket bet tarzhet ar vombezenn e-doug an emvod. Pa zegouezhas an uhelidi, gant dale bras, e oa polised e-leizh ganto, - ar pezh na viras ket ouzh ur c'hantad a vroadelourion, darn anezho izili eus Cymdeithas yr Iaith Gymraeg (Kevredigezh ar yezh kembraek) da zont gant skritelloù taer a-walc'h : "Kembre a dal 150 000 lur sterling d'ar priñs saoz", "Republik, ya ! Roueelezh, nann !". Youc'hal a rejont a-unvouezh ar ger "Republik !" ha kanañ ar c'han broadel. An archerion a glaskas o skignañ hag a harzas meur a hini anezho.

E meurzh 1968 e voe laeret ur bern danvezioù tarzhe en ur vengleuz c'hreunit e-kichen Bala (Meirionnydd). Ar pevare laeradenn a zanvezioù tarzhe e oa dindan zaou vloaz e Kembre. Un nebeut devezhioù war-lerc'h e strake ur vombezenn dirak ti-kreiz an telloù e Caerdydd. E derou miz mae e kemennas ar gouarnamant en doa divizet sevel ur stankell nevez e traonienn an Dula (Sir Drefaldwyn) evit pourchas dour da vBirmingham ha da c'hreantioù ar Severn. Kreskiñ a ra ken buan ezhommoù dour ar greantioù-se ma ne vo ket a-walc'h e 1970 gant lenn Clywedog echu e 1967. D'an 25 mae 1968 e tarzhas ur vombezenn greñv-kenan e-tal savadurioù ar Welsh Office e Caerdydd, e-lec'h ma labour 300 amaezhiad evit ar Gurunenn : torret e voe 200 preneustr ha gwastet 36 sal. Daou zevezh goude e tarzhe un ijin all er menezioù. D'an 27, da 02.45, e voe drastet gant ur bec'hiad gelinit pileroù ur san-dour e traoñ stankell

Vyrnwy a zaspugn dour evit Liverpool ha Manchester.

Diwar an div gerc'hadenn diwezhañ-mañ, o tegouezhout da heul taolioù niverus all, ez eus savet cholori bras er vro. Goulennataet ez eus bet ouzhpenn 300 den diskred warno a vezañ izili eus ar F.W.A.. A-benn stourm efedusoc'h ouzh ar sponterion gembr-eat ez eus bet krouet ur gevrenn arbennik eus ar bolis a genlabouro strizh gant ar Bolis Torfedel. Fiziet eo bet er gevrenn arbennik-se ar gefridi da wareziñ ar priñs Charles pa zeuy da Gembre evit e gadoridigezh.

An Ao. THOMAS, Sekretour-Stad nevez evit Kembre (abace adaozadur ar gouarnamant WILSON e meurzh 1968) en deus taget Plaid Cymru nevez'zo : "Krouet o deus un euzhvil n'int ket mui evit mestroniañ. Seurt oberoù feuls a glot mat gant an aergelc'h brein o deus tud ar bPlaid danzeet e Kembre". Diouzh e du en deus Gwynfor EVANS embannet ur c'hemennadur en anv ar strollad evit kondaonifiñ ur wech c'hoazh ar sponterezh. Hervezañ ne ve ket souezhus e ve aze labour ur bagad kuzh war urzh ar gouarnamant saoz evit divrudañ ar bPlaid ha mirout outi a vont war-raok... Un devoud c'hoazh o tiskouez ar pouez roet d'ar sponterezh kembreat : breud zo bet e Westminster a-zivout an diarbennoù kemeret gant ar gouarnamant evit stourm outañ. Taget eo bet Gwynfor EVANS ha ranket en deus c'hoazh kondaonifiñ ar F.W.A. dirak an holl gannaded saoz. E Kembre zoken, en deus Elwyn ROBERTS graet galv ouzh ar bolis a-enep da dud ar F.W.A.. Sekretour-meur Plaid Cymru eo an Ao. Elwyn ROBERTS.

E Breizh hon eus klevet ivez seurt galvoù a-berzh an AoAo. PLEVEN ha FREVILLE goude kerc'hadenn Sant-Brieg. Souezhus eo d'ar sell kentañ emzalc'h Plaid Cymru, met aes eo da gompren mar lakaer e konthe c'hempennelouriezh a-viskoazh. Emañ enta an Emsav kembreat o sankañ en un enkadenn a c'hell bezañ grevus, rak danvez frammoù ar Stad kembreat zo betek-henn e piaou ar bPlaid tra m'emañ ar youl dispac'hel gant ar F.W.A.. EMVR-30

Iwerzhon : Sinn Féin hag ar "Criminal Justice Bill".

Pemont vloaz goude an Dispac'h emañ c'hoazh an dispac'herion iwerzhonat o stourm en o bro a-benn diraez pal an Dispac'h endeeun. Hag ar gouarnamant dinaouet eus an Dispac'h a rank kemer e ziarbennoù outo. Un heklev eus ar saviad mantrus-se a gaver er pennad-mañ daveet d'ar Wask gant Sinn Féin d'ar 17 06 68 :

"Dizegemeradus a-grenn eo darn eus diferadennoù ar "Criminal Justice Bill, 1967, embannet nevez'zo. Fellout a ra da Sinn Féin tennañ evezh tud ar vro ha dreist-holl an holl strolladoù na gemeront ket perzh er galloud, war an dinac'h eus ar gwir da enebifiñ ent-foran, evel ma'z eo intentet gant ar gouarnamant Fianna Fáil a ginnig al lezenn-se.

"E-touez an danvez diferadennoù emañ ar re-mañ :

- Endalc'het e vo aozerion ar bodadegoù pe an displegadegoù da gas keloù d'ar bolis 24 eurvezh en a-raok. An direizhadennoù nemeto a vo an obidoù, al lidoù relijiel hag an emvodoù dilennel. Nep bodadeg-enebifñ nann diskleriet a vo enep lezenn.

- Gant ur "Garda Superintendent" e vo ar galloud da verzañ nep bodadeg pe da lakaat strishadurioù warni.

- Enep lezenn e vo nep atizadur da na baeañ telloù, taosoù, tailhoù lec'hel, h.a.

- Disentezioù ar varnerion, zoken ar varn d'ar marv, ne vint ket mui hiviziken douget dre an unvouezh hogen dre ar muiañ mouezhioù.

"Kement-mañ n'eo nemet un nebeut skouerioù eus an torradurioù grevus a vez graet d'ar frankizoù keodedel en Iwerzhon. Emaomp endeo, er parzh-mañ eus ar vro, dindan an "Offences Against the State Acts, 1939 & 1940". Evit doare, e ve bet spontet gouarnamant an Ao. LYNCH gant ar reuzioù diwezhañ, evel re ar gouerion hag an dud dilojeiz.() Etre daouarn ar gouarnamant hag ar bolis e vo lakaet ar gwir da enebifñ, da abegiñ, frankiz ar gomz.

"Anat eo emañ troet diferadennoù al lezenn-se a-enep d'ar Republikaned, ar c'hweluniadoù micherourion ha kouerion, an uniadoù feurmerion, h.a.. Kement hini a briz ar rezid ha frankiz ar gomz a rank sevel enep al lezenn-se, hag a rank henn ober BREMAÑ, en un displegadeg foran a-enep d'an hollvelouriezh. EMVR-31

Iwerzhon ambilherez ar broioù kelt war-du ar rezid ?

Eus embannadenn Sinn Féin mezheven 1968 e tennomp ivez ar pennad-mañ :

"Hervez Daily Telegraph eus ar 04 06 en deus an Ao. Brian LENIHAN, Maodiern an Deskadurezh an 26 kontelezh, lavaret e ve ur fazi evit Skos ha Kembre en em zisrannañ diouzh Saoz. "Avizet e vefent o virout o liammoù gant Saoz", emezañ. Goude gouzaviñ en doare-se Skosiz ha Kembreiz, e teu an Ao. LENIHAN da lavarout e vijemp bet gwelloc'h a bell mar en dije GLADSTONE grataet deomp an Home Rule ha ma ne vije bet morse eus Emsavadeg 1916.

"Ur stroñsadenn e vo a dra sur an diskleriadur-se d'hor breudeur gelt. Troc'hañ hent o deus graet "Soldiers an Destiny" ar Strollad Republikan a-c'houde 1925. Zoken ar Mirour Daily Telegraph a soñj ned eo ket meno pobl Iwerzhon eo a zeu gant an Ao. LENIHAN.

"Tamm-ha-tamm, ha suroc'h a-se, e tro politikerion Leinster House o c'hein ouzh an hengoun republikan, hag hon digas d'ur c'hendeuzadur klok gant Bro-Saoz. Pouezus eo e verzfe hor pobl ne glot ket he youl gant mennadoù an Ao. LENIHAN. Ken pouezus eo e ve merzet an hevelep tra gant emsavioù broadel ar broioù kelt all.

"Ar re a striv da seveniñ amkanioù Embannadenn 1916 ha Raklun Demokratel an Dael Gentañ, er strolladoù republikan, c'hweluniadel ha yezhel, zo ar re nemeto a gomz hiziv gant mouezh wirion an Disrannouriezh Iwerzhonat. Diaes e ve mont pelloc'h er pilpouserezh eget ar strollad Fianna Fáil pa'z aio disul a zeu en e anv an Ao Jack LYNCH hag an Ao. Ruairí BRUGHA d'ober "gwazoniezh" da vez Wolfe TONE." EMVR-32

NOTENNOU ARMERZHEL (17)

AR RIÑVEREZH ARMERZHEL

II. AN NEVIDOU

An nevid.

An nevid hon eus bet tro da dermenañ c'hoazh. Daouad ar c'hinnig hag ar goulenn eo. Diwar se e verk ivez :

- ar c'heñver a zo etre ar c'hinnig hag ar goulenn; pa vez kevatal kinnig ha goulenn, e lavarer emañ an nevid e kempouez;

- an darempred etre ar c'hinniger hag ar goulenner; pa ne vez ket dieub an eil pe egile en e zibaboù, e lavarer ez eo gludek an nevid;

- an hollad eus ar c'heñverioù kinnig-goulenn pe eus an darempredoù kinniger-goulenner :

- pe e-keñver ur varc'hadourezh lavaret : nevid ar gwinizh;
- pe e-barzh bevennoù douaroniezhel : nevid broadel, nevid bed;
- pe en daou geñver-se war un dro : nevid saoz an acour.

Ar goulenner hag ar c'hinniger a reer anezho neviderion, pe c'hoazh eskemmerion. Kevrank nevidel, pe kevranc armerzhel a reer eus o c'hejadenn, - kevranc a dalvez war un dro "kejadenn" hag "emgann". Lavarout a reer da skouer e tisoc'h ar priz eus ar gevranc nevidel.

E-ser ar gevranc nevidel e vez renet ar breutadur, - lavarout a reer c'hoazh, boutinoc'h, ar marc'hata. Klozañ a ra ar breutadur gant ar gevrat, a anver c'hoazh ar marc'had. Hervez furm ar gevranc ec'h en em framm disheñvel an nevid : anat eo ne vez ket heñvel gont p'en em gav ur gwerzher dirak dek prener ha p'en em gav dek gwerzher dirak ur prener hepken; studiañ a reer enta an nevid hervez ar frammoù a c'hell bezañ dezhañ. Gwelet hon eus c'hoazh (Emsav 17/152) keal framm an nevid.

Al lec'h ma kej kinniger ha goulenner a anver nevidva. Ul lec'h difetis, ul lunegorenn, e c'hell bezañ, o verkañ neuze hollad ar c'hevrankoù eus ur seurt lavaret : nevidva ar c'hredoù eo ar bankoù. Ul lec'h fetis e c'hell bezañ ivez, an dachenn ma en em vod an nevid-erion evit kas o c'henwerzh; er ster-se e lavarer ivez ur marc'had : kas pesked d'ar marc'had. Ledanaet eo bet keal ar marc'had, hag astennet d'ar c'henwerzh etrevroadel : ar C'henvarc'had da skouer zo ur stroll riezoù liammet dre un emglev war nevid un niver marc'h-adourezhioù.

Ur ster all zo gant ar ger marc'had, hini a gevrat nevidel, kevrat-eskemm : ober marc'had, tonkañ ur marc'had, terriñ e varc'had.

An nevidadoù

Lakaat ur mad, ur gwazad en nevid a lavarer c'hoazh e nevidañ. Kement mad pe wazad kinniget pe c'houlennet, gwerzhet pe brenet zo enta un nevidad. E-keñver nevid e seller ouzh daou zoare eus ar madoù : bezañ unvanberzh, bezañ dizunvanberzh.

Unvanberzh ez eo ur varc'hadourezh pa ne gemm ket he ferzhded eus ur standilhon d'unan all. An aour, ar gwinizh, da skouer, zo madoù unvanberzh pa ne reer kemm ebet etre un dolzenn hag unan all, ur sac'had hag unan all.

Dizunvanberzh eo ur varc'hadourezh pa'z eus kemmoù perzhded etre ur standilhon anezhi hag unan all. Ar gwin da skouer zo ur c'henderc'had dizunvanberzh : ne vez ket diforzh prenañ ur voutailhad eus ur bloavezh kentoc'h eget eus ur bloavezh all, pe eus ur seim kentoc'h eget eus ur seim all.

Disheñvel-bras e vo enta ar gevranc ha framm an nevid hervez ma vo unvanberzh pe dizunvanberzh an nevidad.

An neviderion

Ken disheñvel-all e vo framm an nevid hervez niver ha ment an

neviderion o kejañ e-ser ar gevrank, hervez ivez o ersav hag ar stlenn o tont en o c'herz.

Niver an neviderion zo un elfenn bouezus-bras eus an nevidoù. Evit ur varc'hadourezh lavaret ez eus un niver a genderc'herion (kinnigerion, gwerzherion) hag un niver all a vevezerion (goulennerion, prenerion). An daou deskad-se a seller outo evel daou gamp o ren an emgann, - ar gevrank, - etrezo.

Saviad pep kamp arsellet diouzh niver e "emgannerion" a dermener

- evel ul liessaviad pa vezont niverus (kantadoù, miliadoù, h.a.);
- evel un nemeursaviad pa vez un niver bihan anezho (daou, tri, pevar); komz a reer ivez eus daousaviad, trisaviad, h.a.
- evel un unsaviad pa n'eus nemet un nevider e kamp ar goulenn pe e kamp ar c'hinnig.

Ment an neviderion zo ken pouezus-all. Pa c'hoarvez pep nevider eus un hinienn, ez eo heñvel ouzh uloc'h teskad an neviderion, pep hini eus an uloc'henoù o vezañ bihanbouez ha kevatal d'ar re all; anv a reer eus diskejennegezh an neviderion, - diskejenn o vezañ un anv all roet d'an atomenn.

En enep, pa vez dasstrollet an hiniennoù d'ober unvezioù bras-oc'h, e komzer eus molekulennegezh. Digevatal e vez ar "molekulennoù" etrezo ha reoù 'zo o deus pouez bras en armerzh ur vro, ur ranndir. Ur c'hweluniad micherourion, da skouer, zo ur volekulenn ramzel e nevid al labour.




Ersav an neviderion a c'hell bezañ dieub pe dindan rediezhoù diseurt, - dezvel pa n'o devez ket gwir da zibab, breidel pa vezont lakaet dindan gazel-ge gant an daranverezh. Un nevid ma ren dieubiezh an dibaboù kenkoulz hag ar frankiz enkerzh hag ezkerzh, a vez lavaret berus. Un nevid skoilhet gant rediezhoù a vez lavaret gludek; derez uhelañ ar c'hludegezh eo ar sonnadur : sonnet eo an nevid pa n'eo ket mui evit c'hoari, pa ne chom gant an neviderion tu ebet da embr-eger o frankiz dibab.


Ar stlenn e kerz an neviderion a c'hell bezañ paot a-walc'h da reiñ dezho un anaoudegezh sklaer eus ar saviad ha, dre-se, an tu da reizhañ o ersav dioutañ. Nevid boull pe nevid divoull ez eus hervez m'o deus pe, er c'hontrol, ma n'o deus ket an neviderion en o c'herz holl ditouroù ar saviad.

Rummadur an nevidoù.

Diouzh kenaoz an degouezhioù emamp o paouez menegifñ e c'haller empennañ diseurtiezh ar frammoù nevid kavet war an dachenn. N'eo ket didalvoud o renkañ e rummoù ha sevel un daolenn anezho.

A-raok stagañ gant renkidigezh ar frammoù hervez niver an neviderion e raimp keal eus klokted ha diglokted un nevid. Seul glococ'h e vez barnet un nevid ma kaver gantañ brasoc'h pep hini eus an doar-eoù deskrevet diagent : unvanberzhded ar c'henderc'had nevidet, disk-ejennegezh an neviderion, berusted, boullded.

Mar seller bremañ ouzh niver an neviderion e tiverzer meur a dro hervez m'emañ an eil pe egile eus an daou gamp en unsaviad (arou-eziet amañ : ) , e nemeursaviad () , e liessaviad () .



unsaviad daou duek



unwerzhouriezh
amduek
unprenouriezh



unwerzhouriezh
unprenouriezh



nemeursaviad daou duek



nemeurwerzhouriezh
nemeurbrenouriezh



kevezouriezh rik
(liessaviad daou duek)

Notenn. - Pep lun zo da lenn e daou zoare lerc'h-ouzh-lerc'h :

- 1) kinniger - goulenner
- 2) goulenner - kinniger.

Ouzhpenn an degouezhioù-mañ e c'hallfed degas an nevidoù diglok. Kemeromp da skouer degouezh an unwerzhouriezh; mar bez dirak an unwerzhour ul liessaviad diglok eus ar goulenn, e komzor eus un

unwerzhouriezh diglok.Penaos e vez kavet ent-fetis ar frammoù nevid furlmel-se ?

Ar gevezouriezh rik a empleg un niver bras a ginnigerion hag un niver bras a c'houlennerion. Dibaot a wech e vez klok : er Yalc'h, nevidva ma vez anavezet e pep mare gant an holl stad ar c'hinnig hag ar goulenn, - skouer a nevid boull. A-du-rall e vez bepred diglok ar gevezouriezh rik.

An unwerzhouriezh, en enep, a gaver alies war an dachenn. Ober a reer un diforc'h etre unwerzhouriezh naturel (da skouer, dre vezañ perc'henn ar vengleuz nemeti a zo en nevidva) hag unwerzhouriezh dezvel (pa vez fiziet gant al lezennoù en ur preveziad ar brient da genderc'hañ ha da werzhañ ur mad pe ur gwazad); koulskoude, peurliesañ e chom an unwerzhouriezh dezvel e piaou ar Stad hag e komzer neuze eus unwerzhouriezh stadel, - degouezh ar poultrou-tarzh, ar butun e Frañs, h.a.

Envel a reer unwerzhouriezh levezonel, dangorel, pe c'hoazh pennwerzhouriezh, ar framm nevid o tisoc'hañ eus ar gevezouriezh pa'z eo deuet a-benn unan eus ar gevezerion da drec'hiñ war ar re all dre hoalañ da skouer o arvalion diwar-bouez e zaranverezh.

An unsaviad daouduek a anavezet abaoe eil palevarzh an 20^t kantved hepken. E gavout a reer da skouer pa ra marc'had ur gevelour a brenerion gant un unwerzhour pe ur gevelour a werzherion. Met dreist-holl ez eo ar furlm kemeret gant nevid al labour er broioù greantel, kevread ar c'hweluniadoù oc'h en em zerc'hel a-dal da gevread ar batromed.

An unpreneriezh zo degouezh ur prener unel dirak lies gwerzher. Ar S.E.I.T.A. (Kevredad ar Butun) da skouer e Frañs, zo ar prener dezvel nemetañ eus ar plant butun gounezet gant un niver bras a genderc'herion.

An nemeurwerzhouriezh zo ar framm nevidel azonusañ eus ar reizh-

iadoù frankizour. Ur skouer splann anezhi a gaver gant ijinerezh an tangirri, ma vez dalc'het an nevidva gant un niver bihan a firmoù bras, - goudeuzet enno eo bet an embregerezhioù bihan.

An daouwerzhouriezh zo saviad daou ginniger dirak ur yoc'h a c'houlennerion. Emgann a vo etre an daou evit aloubiñ an nevidva a-bezh. Dezhannet e vez elfennoù ha dibun an emgann-se e termenoù a rihverezh armerzhel hag ur vrezeloniezh kemplezh zo bet savelet.

An trigwerzhouriezh zo un degouezh heñvel a-walc'h, nemet ez empleg ur gudenn-derou ouzhpenn : hini an emglev kadoniell etre daou eus an tri firm evit diskar an trede ha rannañ etrezo ar parzh eus an nevidva a zalc'he.

Kevamzalc'h an nevidoù.

Nevid ur varc'hadourezh ned eo ket dizalc'h diouzh nevidoù ar marc'hadourezhioù all. A-zalc'h e vez da skouer priz ar gwinizh ouzh priz an temzoù, ha priz ar segal ouzh priz ar gwinizh. Un amzalc'h a reer eus an darempred-se etre ar prizioù ha, da heul, etre an nevidoù. Lavarout a reer ez eo amzalc'het priz pe nevid ar gwinizh gant priz pe nevid an temzoù. Pa vez kenlevezon etre daou briz, daou nevid, e lavarer emaint en ur c'heñver a gevamzalc'h pe emañ kevamzalc'het an eil gant egile.

Lies modelezh a amzalc'h a zeskriver. Roet hon eus skouer priz ar gwinizh amzalc'het gant priz an araezioù lakaet d'o c'henderc'hañ (temzoù, hadoù, binvioù, labour); mar seller ouzh treug ar c'henderc'hañ, e stader emañ eno amzalc'h ur stael lec'hiet en argrec'h war ur stael lec'hiet en ardraoñ, setu perak e komzer eus amzalc'h diwar grec'h en degouezh-se. Amzalc'het emañ ivez priz ar gwinizh gant priz ar c'henderc'hadoù tennet diouto, ar bleud hag ar brenn pergen; evit menegiñ al liamm-se e reer anv a amzalc'h diwar draoñ.

An daou amzalc'h diwar grec'h ha diwar draoñ a anver amzalc'hioù treugel, peogwir ez anadont e-ser an treug (an tremen eus par an danvezioù krai da bar ar pleuskadoù). Mar seller bremañ ouzh an

amzalc'h a c'hell kaout priz ar gwinizh war brizioù an edoù all, e lavarer ez eus anezhañ un amzalc'h kensavel.

Un amzalc'h a vez lavaret a-gendu, pe muiel, pa argemm a-gendu ar priz amzalc'her hag ar priz amzalc'het; a-c'hindu, pe maezel, pa argemmont a-c'hindu.

Klokausted, atalusted

Pa gresk bastusted ur mad A war un dro gant bastusted ur mad B, e lavarer ez int klokaus an eil d'egile. Seurt kenglokausted a gaver evel un devoud eus ar c'hinnig, pe evel un devoud eus ar goulenn.

Kenglokausted ar madoù kinniget. Ar c'hinnigoù kenyevet. Ur mad klokaus d'unan all e-keñver kinnig zo ur mad kenderc'het dre ret a-gevret gant egile all, - da skouer al ler hag ar c'hig, ar plouz hag ar greun, an aezhenn-leskiñ hag ar goulosk. Er greanterezh e reer adkenderc'had eus ar mad klokaus er c'hinnig. Priz-gwerzhañ an adkenderc'hadoù ne vez ket amzalc'het gant ar c'houst-kenderc'hañ, met jedet e vez e doare da zevoudañ ur goulenn bras a-walc'h.

Kenglokausted ar madoù goulennet. Ar goulennoù kenyevet. Ur mad klokaus d'unan all e-keñver goulenn zo ur mad bevezet dre ret a-gevret gant egile all, - da skouer an tangirri hag ar strilheoul, ar c'hafe hag ar sukr, ar skriverezed hag ar paper.

Mar digresk bastusted ur mad A pa gresk bastusted ar mad B, e lavarer ez int atalus an eil d'egile. Seurt kevatalusted a gaver ivez evel un devoud eus ar c'hinnig hag evel un devoud eus ar goulenn.

Kevatalusted ar madoù kinniget. Ar c'hinnigoù ginyevet. Anadiñ a ra da skouer pa c'hell daou vad disheñvel bezañ kenderc'het a bep eil gant an hevelep unvez-kenderc'hañ, - pa c'hell an hevelep douar talvezout da vogañ bioù pe da c'hounit gwinizh. An hevelep amzalc'h a-c'hindu a c'hoarvez ivez etre madoù amsavus an eil re d'ar re all : pa voe ijinet ar gwiadoù kevanaoz, e tiwanas hag e kreskas ar c'hinnig anezho diwar-goust kinnig ar gwiadoù naturel.

Kevatalusted ar madoù goulennet. Ar goulennoù ginyevet. E vit ur barr-bevañ lavaret, mar prener ur benveg skinwel ne c'hallor ket prenañ ur yenez. Mar bez difennet ouzh ar c'hlañvour a evañ gwin, ha mar sent, e kresko en e diad bevezadur an dour melar diwar-goust bevezadur ar gwin. Kevamzalc'h maezel a zo etre ar madoù kevatalus.

Ar gevezouriezh rik ha klok.

Ar gevezouriezh rik a reer anezhi c'hoazh al liessaviad daou-duk, - un niver bras a werzherion o vezañ dirak un niver bras a brenerion. Gant an armerzhourion glasel e veze sellet ar gevezouriezh rik evel framm skouerel an nevid. E gwir, an devoudoù a ziskouez ne vez nepred koulz lavaret kavet en he stumm rik ha klok en armerzh greantel. Arbennoù liesseurt a zo da seurt dibaoted :

- seul stankoc'h an neviderion en daou gamp, seul rikoc'h ar gevezouriezh; hogen tennañ a ra bepred niver ar werzherion da goazhañ : steuziñ pe c'houdeuziñ a ra an embregerezhioù bihan;

- seul klokoc'h e vez ar gevezouriezh ma chom pep nevider en daou gamp dizalc'h-mat diouzh levezonoù pe destrizhoù ar re all, - azon an diskejennegezh eo. Hogen emglevioù a vez etre ar werzherion, - pa ouestlont derc'hel o frizioù dreist un isvevenn divizet, hag etre ar brenerion, - pa ouestlont nac'h prenañ mar sav ar prizioù dreist un usvevenn divizet.

- seul klokoc'h e vo ivez ar gevezouriezh ma chom dieupoc'h pep nevider da gemer perzh pe get en nevid. Azon ar verusted eo. Rediezhoù ha destrizhoù niverus a vez avat war ar werzhourion hag ar brenerion.

- un amplegad all da glokted ar gevezouriezh eo boullded an nevid, pep nevider o c'houzout e pep mare sav ar c'hementadoù kinniget ha goulennet, kenkoulz hag ar prizioù keñverek. Divoull e vez avat an nevidoù ent-devoud, ha ne vez ket kavet skouerioù a gevezouriezh klok da studiañ war an dachenn, - lakaet er-maez ar Yalc'hoù evel m'hon eus merket c'hoazh. Koulskoude, ent-damkanel, ez eo pouezus-bras

digejañ savelennoù ar gevezouriezh klok ha reiñ dezho ur furn jedon-iezhel, zoken mar ranker lezel ganto da c'houde un derez bras pe vrasoc'h a arnesadegezh. Studiomp enta dinodadur ar priz evel disoc'h kempouez an nevid er gevezouriezh klok.


Ar priz diwar gempouez an nevid

Un diforc'h a reer etre priz padel ha priz predel.

Dinodadur ar priz predel (pe priz red).

Kemerout a reer un nevid lavaret en ur c'houlz lavaret. Tresañ a reer krommenn ar c'hinnig ha krommenn ar goulenn a-gevreizh d'ar prizioù. Diskouez a reer e verk o foent-skej ar c'hempouez gallus nemetañ. Ar priz a zo hedenn ar poent-se eo an hini a rank dinodiñ.

Eus studi ar c'hrommennoù-se ez eus bet digejet un nebeut pennaennoù :



Sk.1.

a) Pennaenn ar c'hevatalder : poent-skej an div grommenn a lugin kevatalder ar c'hinnigoù hag ar goulennoù, hag ar poent-se nemetañ. Poent ar vrasañ prenadur hag ar brasañ gwerzhadur eo.

b) Pennaenn an unelded, anvet c'hoazh pennaenn JEVONS (sl. Emsav 10/268): en un nevidva lavaret ne c'hell dinodañ nemet ur priz evit ur mad lavaret.


k) Pennaenn ar c'hempouez : dioutañ e-unan e tenn ar priz gweredel (ar priz embreget war an dachenn) da zistreiñ er savlec'h kempouez, lakaet e ve bet pellaet diouzh ar savlec'h dre un darvoud bennak.

d) Pennaenn al leveoù : ar priz unel diwar gempouez an nevid a zevoud dreistadoù dangorel e kamp ar werzherion evel e kamp ar brennerion (sl. Emsav 10/274).

Dinodadur ar priz padel (pe priz reol).

Ar gudenn eo gouzout ha derc'hel a ray ar priz en hevelep savlec'h bepred, eleze ha chom a ray ar c'hrommennoù goulenn ha kinnig er savlec'h a anavezet dezho en ur pred lavaret. Anat eo e c'hell kreskiñ pe zigreskiñ ar c'hinnig gant an amzer, ha heñveldra evit ar goulenn. Studi o argemmoù a laka da dermenañ savelenn an nevid (Sk.2.) :

1. E-keñver ur c'hinnig kendalc'hel, e laka kresk ar goulenn ar priz kempouezet da c'horren.
2. E-keñver ur c'hinnig kendalc'hel, e laka digresk ar goulenn ar priz kempouezet da c'houzizañ.
3. E-keñver ur goulenn kendalc'hel, e laka kresk ar c'hinnig ar priz kempouezet da c'houzizañ.
4. E-keñver ur goulenn kendalc'hel, e laka digresk ar c'hinnig ar priz kempouezet da c'horren.



Daelerezh an nevid. Bezet C priz-koust ur mad lavaret. Mar bez ar priz predel P brasoc'h eget C, e tegouezh d'ar gwerzher ur buza dre unanenn $P - C$. Kerkent hag anavezet avat e tedenno ar buza-se kenderc'herion nevez. Alese e kresko ar c'hinnig ha, da heul, mar bez chomet kendalc'hel ar goulenn, e c'houzizo ar priz e P'. $P' - C$ a zigreskoenta. Empennañ a c'haller ur priz predel P'' hevelep ma'z eo $P'' - C < 0$; seurt priz a ray d'ar c'hinnig digreskiñ ha d'ul lod eus ar genderc'herion steuziañ. Luskellañ a ra enta P en-dro da C. Setu perak e kaver klokaat didermenadur ar priz diwar gempouez an nevid dre un didermenadur anezhañ diwar gempouez an embregerezh.

